

140

Ar Poelonneg potin.

(79, suite)

Selaouit, mignonnet demeus a Vreiz-Tzel,
Eun histor a zo güir, ha nan eur rismadel.

Eun demezel yaouanc demeus a Vontroulez,
Pa vije amzer yen, gant Janned, he matez,
Peurvuia en he c'hamp, mes serret cloë an nor,
En em denne hep aoun n'eljet dont d'e digor.

Ar gambr ne voa get bras: beza voa decoret
Demeus eur selasen gaer ha demeus eur poltret.
Eno, en creiz ar gambr, voa eur poelonneg bian,
Pini a zerviche da domma er gouân.

Ar Poal voa en potin, ha varnân e lennet
Ar blavez mil eiz-cant, en pini e voe grêt,
Sacrific Abraham, ha calz eus a draou all,
Pere rente ar Poal eur prez dreist-ordinal.

(80)

Eun deiz a c'houân vras e sonjas ar vestrez
Guervel he flac'h Janned, o lavarar: Potrez,
Riou a zantân meurbet, hac e meus c'hoant tomma
En qichenmic va foal, hep nep jey en netra....
Redec a sêr d'ar gambr, hac e lavar: Jannet,
Sêr mad an nôr varnomp, vit ne vimp get jenet.

Cetu an demezel ouz ar Poal o tostât,
O sevel he robe, mes dre adréñ errat!
An domder douç a zant a rê plijadur dêi,
Ha Jannedic a c'hoarz en eur zellet anêi.
Ah! tamic lutinez! perac e c'hoarzes-te?...
Erme an demezel, a vouse'hoarze ive.
Santout a rê gant joa eur gontantamant vras,
Ha demeus ar poelonneg e tosta eun tam c'hoas.

Ret eo d'êc'h, va lenner, gouzout presentamant
Penos var ar poelonneg voa an dat mil eiz cant;
Penos an demezel a domme, hep nep aon
Arzjouc'h ha tost d'an dat he fenn hard eus an traon.
En em gaout a rê bras er bosition-ze,

(81)

Hac e sonje michañz chom c'hoas pell er quis-se.
 Allas! er bed paour-mañ, na zonzjer nebeuta
 E teu eun dra benac da hon tarabusta:
 Eure benac a glêo o furetal an nôr;
 An demezel a spont rac aoun vije digor,
 Ha maleürusamant e pozas he feggen
 Var an dat, voa rus-tân.... Diouc'h-tu eur griaden
 A leuscas a boez penn. Jannedic zo tostët,
 Var feggen he mestrez e velas imprimet
 An dat maleürus-se, an dat a vil eiz count,
 Pehini a rê dêi souffri un horrupl tourmant.
 — Oh! va Jannedic paour! nac a boan a zantan!
 Va feggenigou qez, an dêv evel an tân.
 Red, red, va mignonez... Clasc d'am zicour eure,
 P'otramant vin maro gant vare'hoas ar beure.
 Jannedic a quertz prim da glasc eur medecin,
 Pehini voa o lenn sermon Michel Morin.
 Autrou qez, emerzi, deuit, m'ho ped, buan,
 Da velet va mestrez, na arz mui gant ar boan.
 Jannedic ne voa get evel calz a verc'het,
 Pere, a lavarar, zo babillerezet;
 Caer en d'oe an doctor goulen pelec'h voa 'r boan,
 Jannedic a zalc'he peur-glôs he bequic moan.
 Disquib Esculap zo ractal en em rentët
 Etal ar glanvourez, hac outi goulennet:
 — Pelec'h e santit-hu ho poan, va demezel?
 Hac ho tiezantant a zantit-hu boe pell?
 — Oh, nan, Autrou 'r doctor, E zoan etal an tân...
 Hai, yai!... Lesqi a rân... n'ellân mui gant ar boan.
 — Penos? dêvet oc'h eus unan eus ho memprou?
 Lavanit... Cetu me laget va lunedou
 Erit m'evessain piz ar plaç a zo losquet,
 Hac ellout applica var ar boan eur remed.
 — Oh, nan! ne gredfen get disqueuz dec'h birvigen....
 Ouf! hai! lesqi a rân... ô va faour qez feggen!...
 — Penos! en ho feggen eo e santit ar boan?
 Hastomp, va demezel, ma er guelin buan...
 Rac erit ho pansî eo ret mad din guilet
 Ar plaç, ha t'io vardro el lec'h ma zoc'h losquet.
 — Mâ eta! na zeo ret... Mes laqit eves mad
 Nemet var plaç ar boan teurel ho taoulagad.

(82)

(83)

142

Grit, erit ~~ha~~ fanci, eun toullic em hinvis,
 Mes n'er grit get brassoc'h equet n'eo beg va bis :
 Dre eno c'houi velo avoalc'h ar plas losqet,
 Hac ec'h elfot erwad applica ho remed .

An doctor a droc'h crac an hinvis pen-da-ben,
 Hac an demezel qez zo noas pill he fesqen

— Oh ! eme ar frijpon, gant daoulagad mechant,
 Pa vel var ar fesqen an dat a vil eiz cant,
 Piou ar diaoul bigen elfe dont da zonzal
 Eus eur visach qer coant hac hini eun eal,
 Eve eur reor qer caer a guement bloa ? (1)
 Me euteur bea maout qent credi eur seurt tra .

A. Lédan .

(Vol. VII, p. 79-83.)

(1). - An demezel ne devoa nemet 18 vloas.
 [Le vers est incomplet dans le ms. Il faut suppléer "merqet" avant "a guement bloa".]